

KANTIK

ANN

ITROUNN-VARIA-DRUÉ

Da gana war dôn : *Enor d'oc'h hano benniget*

1

Ann Itrounn-Varia-Drué,

Mamm Jésuz, zo hon mamm ivé,
Breuder ! } *Bis*

2

O pebes mad evidomp-ni

M'é deuz war hon douar eunn ti,
Breuder !

3

Mil ha mil bennoz d'hon zud koz,

Doue d'ho c'has d'ar baradoz,
Breuder !

4

Hi deuz savet er barrez mâ
D'hon mamm eur chapel ar gaërà,
Breuder !

5

Lec'h ma teuer da c'hoùl trué
Euz a Véned hag a Gerné,
Breuder !

6

Er vrô mâ, Gwerc'hez ni ho kar ;
A vouez uhel ni hel lavar,
Gwerc'hez.

7

Rak-zé, o mamm vad, binniget
Hon zud, ann ed hag ar miled,
Gwerc'hez.

8

Pellait ouzimp ann oll reuziou,
Roit nerz dimp enn hon laboriou,
Gwerc'hez.

9

Miret didan ho tiou-askel
Ar vugale enn ho c'havel,
Gwerc'hez.

10

Grêt d'hon breuder, d'hon c'houarézet
Ma trec'hint war ann drouk-spéret,
Gwerc'hez.

11

Dalc'het étre ar prijaou
Euz ho eured ar promessaou,
Gwerc'hez.

12

Hô pêt trué, Gwerc'hez-Vari,
Ouz hon c'hérent enn ho c'hozni,
Gwerc'hez.

13

Euz ar ré glanv hô pêt trué,
Hag euz ann anaoun paour ivé,
Gwerc'hez.

14

Pa zeui ar marv da skei hé d'ol,
Hô pézet trué ouzimp oll,
Gwerc'hez.

Eur vech enn env, Mamm a Drué,
Ni a larô d'oc'h trugaré,

Gwerc'hez.

I : M : Ar MERSER,

Persoun Mellionnek.

Gand Aotréadur

† ANN AOTROU DAVID,

Eskop Zant-Briek ha Tréger.

